

**Kanomp eun Noël Angelik . . .** <sup>(80)</sup>

Kanomp eun Noël angelik (*bis*)  
 D'ar Verchez Sacr ha d'he Mabik (*bis*)  
 Kanomp ni oll asambles :  
     Noël, Noël,  
 Kanomp gant meuleudi,  
 Kanomp ni oll asambles :  
     Gloar d'ar C'hinivelez.

Noz Nedelek, da hanter-noz (*bis*)  
 Pa oue an oll dud o repos (*bis*)  
 E oue ganet gant Mari,  
     Noël, Noël,  
 Kanomp gant meuleudi,  
 E oue ganet gant Mari,  
 Jezus er marchosi.

Tri Roue braz euz a bel bro (*bis*)  
 Ho deuz roet lod euz ho mado (*bis*)  
 Hag ho devez embannet,  
     Noël, Noël,  
 Kanomp gant meuleudi,  
 Hag ho devez embannet  
 E oue Jezus ganet.

Eur bloavez mad a rekelan (*bis*)  
 Da gement den zo en ti-man (*bis*)  
 Iec'hed ha prosperite,  
     Noël, Noël,  
 Kanomp gant meuleudi  
 Iec'hed ha prosperite  
 Barados d'oc'h ene.

<sup>(80)</sup> Noël chanté par les enfants de chœur de Lesneven. -- Il était connu à Plogonec il y a quelque cinquante ou soixante ans. Les trois premières strophes dérivent du Noël précédent. La dernière formule des souhaits de nouvel an.